



**Dibenn-sizhun evit ar familhoù  
hag an dud gour deuet hep bugel  
12 – 14 a viz Mae 2023**

**BILAÑS  
AR STAJIDI**

**STUMMAR C'HOULENNAOUEG ROET D'AR STAJIDI e prantad bilañs ar Sul**

**GOULENNAOUEG BILAÑS**

Deuet gant bugale  Deuet hep a vugale   
Doare-lojañ : Ti-koad  Tachennig-kampiñ

Anv (diret me aesoc'h).....

**AN DACHENN-GAMPIÑ** : lojeiz / en-dro

Mat-tre  Mat  Mat a-walc'h  Ne oa ket mat

Evezhiadennoù :

**AR BOUED** : Kementad, blaz...

Mat-tre  Mat  Mat a-walc'h  Ne oa ket mat

Evezhiadennoù :

**AN AOZADUR** : degemer, programm, kelaouiñ...

Mat-tre  Mat  Mat a-walc'h  Ne oa ket mat

Evezhiadennoù :

**BILAÑS HOLLEK**

Mat-tre  Mat  Mat a-walc'h  Ne oa ket mat

Evezhiadennoù :

**SINTEZENN AR RESPONTOÙ SKRIVET**

**7 respont / 10 familh**

Tud deuet gant bugale (ur respont dre familh/kouplad)	Niver a respontoù	Mat-tre	Mat	Mat a-walc'h	Ne oa ket mat	Respon t ebet	Kinnig (un den)	MAT-TRE pe MAT (pe direspont)	Mat a-walc'h pe ne oa ket mat
<b>AN DACHENN-GAMPIÑ</b> boued/lojeiz/ degemer	7	6	1				Koantig ; Plijus e oa da vezañ an natur e mod-se : ober a ra vat ! Ar roulotenn a oa dreist !; N'omp ket chomet kalz e-barzh evit gouzout hiroc'h, nemet evit kousket ;Sioul, plijus met ur gambr vihan tout eo ar gambr evit ar vugale. Met kousket a reomp mat ; Sal-degemer bras ; An dachenn a oa mat-tre gant an natur. Domaj eo e oa torret ar c'hoarielloù e korn ar vugale ;	7=100%	
<b>AR BOUED</b> Kementad, blaz...	7	5	2				Debret hon eus mat tre ! Prest d'ober krampouezh evit ar wech a zeu !; Mat eo bet ! Klaz a oa ! Ar c'hrampouezh a oa lipous ;	7=100%	
<b>AN AOZADUR</b> degemer/programm/kelao uiñ	7	6	1				Mat e vefe kaout ar programm en a-raok (dre vras) ; Plijusoc'h e vefe ar predoù noz abretoc'h ha berroc'h evit kaout amzer goude ar pred hep kas ar vugale da gousket da 11e noz (ha kaout diaouled skuizhus antronoz) ; Slaer ha plijus e oa pep tra asasaet ; Plijus e oa ar c'hoari war an aod ; Trugarez Faned !; Plijus-tre eo bet gweladenniñ an ti-feurm (x2); Mat eo bet ar c'hoari e Kombrit (x2) ; Diaes eo bet da gompren ar c'hoari c'haloj ; Mat tre evel kustum ; Posupl e vefe lakaat an anv evit an atalier tresañ ?	7=100%	
<b>BILAÑS HOLLEK</b>	7	7					Dibenn-sizhun plijus ; Mat-tre ! Plijus kenañ ; Mersi bras d'an holl (x2) ! Un dibenn-sizhun a feson hon eus tremenet : trugarez ! Trugarez vras deoc'h holl evit ho labour efedus hag ar blijadur hon eus kemeret ; Goulenn a ra ar vugale mont en-dro. Ma n'eo ket an dra pouezusañ evit gouzout hag-eñ e oa mat pe get an dibenn-sizhun. Ekstra evit kas ha kreñfaat al liamm e brezhoneg. Bennozh deoc'h ! Plijus tre eo bet. Diaes eo bet ober tout an traoù gant Ninog met plijus eo bet evit tout an dud. Ken ar c'hentañ gant plijadur ;	7=100%	

**4 respont / 5 familh**

Tud deuet hep a vugale (ur respont dre familh/kouplad)	Niver a respontoù	Mat-tre	Mat	Mat a-walc'h	Ne oa ket mat	Respon t ebet	Kinnig (un den)	MAT-TRE pe MAT (pe direspont)	Mat a-walc'h pe ne oa ket mat
<b>AN DACHENN-GAMPIÑ</b> boued/lojeiz/ degemer	4	4					Brav tre eo bet al lojeiz ; brav meurbet an en-dro ; un dudi ! Mall zo warnon distreiñ ;	4=100%	
<b>AR BOUED</b> Kementad, blaz...	4	4					Mat kenañ pep tra ! Ur bamm eo bet gant ar pred krampouezh (x2); Kig-yar doare euskadi a oa lipous tre ; Mersi bras evit an dud ne zebront ket kig ;	4=100%	
<b>AN AOZADUR</b> degemer/programm/kelao uiñ	4	4					Ouzhpenn-se eo bet brav kenañ an amzer ! Marteze ne oa ket sklaer a-walc'h an eur evit en em aozañ. Hag aet eo kuit Per, ar paotr a oa o henchañ ac'hanomp, ha n'eo ket bet trugarekaet ganecomp, setu trugarez da drugarekaat anezhañ evidomp. Un tamm re abred da vintin ;	4=100%	
<b>BILAÑS HOLLEK</b>	4	4					Biskoazh am eus bet tro d'ober ur staj ken brav-se. Mersi bras Faned (hag ar skipailh aozañ) ; Un tamm re stank an implij-amzer ; Gwelloc'h lâroust d'an dud en a-raok ez eus ur savatur evit bezañ en diabarzh ;	4=100%	

## 2/7 familh

<b>Aozerien (ur respont dre familh/kouplad)</b>	Niver a respontoù	Mat -tre	Ma t	Mat a- walc'h	Ne oa ket mat	Respon t ebet	<b>Kinnig (un den)</b>	<b>MAT-TRE pe MAT (pe direspont)</b>	<b>Mat a-walc'h pe ne oa ket mat</b>
<b>AN DACHENN- GAMPIÑ</b> boued/lojeiz/ degemer	2	2						<b>2=100%</b>	
<b>AR BOUED</b> Kementad, blaz...	2	2						<b>2=100%</b>	
<b>AN AOZADUR</b> degemer/programm/kelao uiñ	2	2					Tremen muioc'h a amzer war blas ; Re stank ar programm ; Leuskel un eur war lerc'h pred 12e evit renkañ, kempenn a-raok kregiñ gant un atalier pe ur bourmenadenn.	<b>2=100%</b>	
<b>BILAÑS HOLLEK</b>	2	2						<b>2=100%</b>	

## RENTAÑ -KONT DRE GOMZ AR SUL

### AN DACHENN-GAMPIÑ

Brav-dispar ; mat-tre ; Mat e vefe lâret en a-raok ez eus ul lec'h evit en em strollañ (karrdi). Tud zo o deus bet riv er c'harrdi.

### AR BOUED

Mat-tre ; re un tamm ; Mat eo degas e listri ; priz mat ; kaout ul listennad tud gouest da dreiñ krampouezh ;

### AN AOZADUR

Re stank ar programm ; Tremen muioc'h a amzer war blas hep kemer an oto ; Dibab al lastez da aozañ gwelloc'h (degas seier melen da skouer) ;

Tud divugel : mat eo bet ober traoù hep ar vugale d'ar sadorn ha gant bugale d'ar Sul ;

Doare taolenn kleiz a oa mat-tre

### AN DAZONT

Goulenn gant an dud gour sikour evit sevel o frogramm.

Lañsañ ar staj gant ur arouez (margodennoù, pe traoù all) evit plantañ ar brezhoneg gant ar vugale ;

Mat e vefe kaout un dra evit ar grennarded, lakaat an anv evit an obererezhioù ;

### HOLLEK

Skipailh aozañ seder ha sioul ;

Brav eo bet ; trugarez evit an amzer ; laouen da zont en-dro. Ar wech kentañ : bro-Dreger ?

Liamm evit sellet ouzh ar goulennaouegoù hiniennel :

<https://keav-cloud.kaz.bzh/s/do33fnKxfSFmYPb>